

Itron ar Faouet

Mar d'an me d'an arme evel ma ze din skrivet
Da pelec'h e kassin va vriet da viret..

– Digassit-hi aman gant ma zimezellet
na pa deuot-hu d'ar ger ma breurik e c'haffet.

Ne voa ket ead mad nag ed mad deus an ti
na kommansas ar vreg kos d'ober dezi marchi

Deviskit o vros rus guiskit o hini ven
mar zeot tu dal da viret an devet.

Na petek ar seïz vla ne re nemet goëla
Pa voa echu ar seïz vla ne re nemet kana.

Pa voa eoznik an henan o tristeï d'ar ger
e kleve ar vergelenik el lan gant he devet.

– Me kleo ar verjeren o kana el lan gant an devet.

Ozenik an henan eun de a lavare
De pachik bihan el lan pa entree :

– Me kleo eur voëz o kana ken ie ken ravissant
kredi a ra din e zeo va friedik koant.

– Debonjour deoc'h berjeren e vessa o tevet
a c'hui a el aze preservi o gwer(c'h)tet.

ia,ia, emezi preservet e meus-he
Da eun den chentil iaouank a zo ed dan arme.

en devoa eur penad bleo blond otrou evel o re.

mar en deus eur penad bleo blond evel va re
en an' Doue berjelen laret din a me a ve.

mar var o pis ar walen am moa dezan roet

— Va berjelenik gwir avoalc'h a leret,
me am boa-hi bed diganti e fin demeus e zezet
mar deuchen biken d'ar vro man de digas d'hi priet.

en an Doue berjelen en an Doue laret din
a c'houi a komerfe eun neubeudig arc'hant a zo aman gane.

na mar o c'heus-hu arc'hant evel ma leveret
Dalchi-ti ganeoc'h da kass d'ar ger d'ho priet.

evid-on da vez a man e tivoël an devet
me zo eun itron vad deus a vaner ar faouet.

en an' Doue Berjeren en an Doue laret d'in
a c'houi a komerfe eun tam lien batist a zo aman gane.

eun habid lien leïen ag e ve goalc'het(1) goen
a zo madig avoalc'h evid ar berjeren.

en an Doue berjerenik en an doue larit din
mar doc'h eun itron vad evel ma leveret
en (an') Doue larit din a me a ve lojet.

ia ia emezi lojet mad e viet
eur goële mad a plun o pezo da kousket
hag eur merchossi kaer da lakad o ronset.

Ar marc'hadour iaouank man er maner p'he arruet
en an'Doue beza lojet e deveus gouennet.

Debonjour a debonjour a joa en ti man
na va friedik me nag e pelec'h e man

he man duze e kamb gant va dimezelet
ember pa deuio noz va breurik en c'haffet.

Gaou a lerez breman den kris a miliget
e man duze el lan e vessa ta denvet.

Pa voant hi deus an dol assamblet da goanian
eur bane dezi en deveus kiniget

sallokras emezi sallokras nen deo ket
e man seïz vla zo en ti man nan deus ket sousiet
me emezi, certainamant zo gred din evel d'ar hi
Pini a ve tolled a tolliou dreid emez an ti.

Pinivit e respecti ti va mam a va zad
me lakache leur an ti man da ruja gant ta c'hoad.

Jannton Puil, 16 juin 1851.

(1) L'a de goalc'het, en surcharge sur un -e- primitif.